

Arnodenn vreed istor an arzoù

Kael brizañ arnodenn vreed istor an arzoù

Danvez prizañ		Poentoù	
Doare ginnig	Kaozeal en e aes hep sell re ouzh e notennoù	/10	/40
	Kinnig sirius		
	Startijenn, youl		
	Dasparzh ha merañ mat an amzer (15 mn)		
Dielfenniñ an oberenn	Labour enklask	/12	
	Kinnig an danvez arz		
	Implijout skouerioù a feson		
	Keñveriañ gant arzoù all		
	Skiant varn war an oberenn		
Goulennoù	Bezañ gouest respont d'ar goulennoù	/10	
Live yezh	Bezañ gouest arguziñ gant ur c'heriaoueg resis	/8	
	Live brezhoneg		

An diaporama war ar penn oberenn

- Pajenn gentañ an diaporama a rank bezañ ur c'hinnig eus steuñv an eztaoladenn (= digoradur: kinnig an oberenn + kinnig ar steuñv)
- Savet vez ur steuñv (ur framm) e 2, 3 pe 4 lodenn (hervez an niver a demoù)
- Arabat disoñjal n'eo ket un eztaoladenn istor met un eztaoladenn arzoù eo.
- Servijout a ra an diaporama da skignañ dielloù (fotoioù...)
- N'eo ket talvoudus skrivañ en diaporama tout ar pezh vo lavaret ganeoc'h, un nebeut gerioù diwar-benn an diell zo tra-walc'h.
- Gwelloc'h eo un nebeut dielloù displeget mat e-lec'h ur bern skignet hep displegiñ netra.
- Gwelloc'h eo dielfenniñ don un arroud e-lec'h chom pell o tiverriñ an oberenn dre-vras
- Ul lajad berr a c'hell bezañ (1-2 munutenn d'ar muiañ)
- Ma 'peus dibabet un oberenn en ur yezh estren e rankit bezañ gouest kompren ha displegiñ
- Reizhañ ar brezhoneg ha klask ar c'heriaoueg 'po ezhomm (gant sikour kelennerien)
- Ret eo deoc'h pleustriñ evit mestroniañ an amzer: 10 munutenn en holl a dalvez 5 munutenn pep hini ! (kasit un eurier devezh an arnodenn !) Ma chomit da gaozeal ouzhpenn 15 mn 'vo troc'het ar gaoz deoc'h gant ar juri.
- Gallout a ra ar gelennerien sikour ac'hanoc'h evit ar steuñv pe difaziañ met arabat gortoz ar poent diwezhañ.
- Enrollit dre ret ho tiaporama e stumm ppt/pps met ivez e stumm PDF. Mirit ur gwarez (pe meur a hini) war un alc'hwez USB.
- Talvoudus ' c'hell bezañ kenlabourat oc'h implijout [framapad](#).

Ar peder oberenn all a rank bezañ anavezet ganeoc'h dre-vras. Goulennoù 'vo savet gant ar juri.

Dielfenniñ oberennoù arz

A - Dielfenniñ tammoù eus filmoù

kinnig

Titl, eus pe vro e teu, severer, deiziad, mare degouezhad ar produiñ : evit pe arvesterien, arc'hantaouiñ, lec'hioù skignañ, degemer gant an arvesterien.

Deskrivañ ha dielfenniñ ul lajad

ar senenn : lec'h ha deiziad
deskrivañ ar senenn : ar pezh a weler
displegañ : ar pezh a gompren

Palioù ar severer

Petra a fell dezhañ diskouez?
Pe zoareoù a implij d'hen ober? Re diazezet war ar gweled (livioù, fiñvoù, kinkladurioù, flash-back...)
Re diazezet war ar c'hleved : mouezhioù, sonerezh, trouzioù....

perzh ar film en istor-douaroniezh

pe skeudenn eus an Istor a zegas al lajad pe ar film deomp?

B - Dielfenniñ livadurioù

kinnig

Aozer : anv, deiziad ha lec'h ganedigezh ha marv, broadelezh
Titl al livadur, bloavezh, pelec'h emañ ?
Degouezhad : darvoudoù politikel hag ekonomikel ar mare m'eo bet livet
Dodenn : ar pezh a zo diskouezet

Deskrivañ ha displegiñ

talenn gentañ : tudennoù (o neuz, penaos en em zalc'hont, o emzalc'h) hag al lec'h
eil talenn : ...
talenn ziwezhañ : ...

Palioù al livour

petra a fell dezhañ diskouez? (arouezioù, abegiñ, sevel a-enep un dra bennak...)
pe zoareoù a implij d'hen ober : stumm an tudennoù, gouloù, fiñvoù...

ster al livadur

petra a weler ha petra eo ster al livadur?

CH - Dielfenniñ skritelloù propaganda

Pal ur skritell propaganda eo embann ur c'hemenn politikel. E lec'hioù foran e vez lakaet ar skritelloù propaganda war ziskouez. Bezañ komprenet mat e rankont bezañ rak kendrec'hiñ eo o fal.

kinnig

pe zoare skritell eo : politikerezh, bruderezh, skritell ur film... ? Pelec'h, pevare ha gant piv eo bet savet?

Gant piv eo bet urzhiet : ar Stad, ur sindikad, ur strollad politikel, ur gevredigezh...

Piv a zo sañset bezañ tizhet?

Degouezhad : da beseurt keñver eo bet savet ar skritell : dilennadeg, lid... ?

Deskrivañ ha dielfenniñ

ar skeudenn : tudennoù, endro, arouezioù...

al lugan : testenn verr, un diverradenn eus ar c'hemenn politikel eo

aozañ ar skritell : ment ha lec'h an elfennoù a weler, livioù, linennoù pennañ

Displegañ

pe gemenn(où) a zo kinniget deomp : barn, lakaat war wel, abegiñ...

efed ar skritell

Petra eo soñj an dud pa welont ar skritell?

C'H - Dielfenniñ kanaouennoù

Ouzhpenn degas dudi e c'hall ar c'hanaouennoù ober. E kanaouennoù zo e kaver kemennoù pe titouroù a-zivout an Istor.

kinnig

doare : sonerezh pobl pe get, danevelliñ pe taolenniñ

titl, aozer, sonaozer, lec'h ha deiziad/bloavezh

degouezhad : darvoudoù politikel, re ekonomikel... ar mare m'eo bet savet

Deskrivañ ha dielfenniñ

ar c'homzoù : mennozhioù pennañ kemmet poz a zo

ar sonerezh : kan (poz pe kan-diskan), binvioù, eilañ (kerzennek pe dastalmek), lusk

hag ivez : skritell, golo ar bladenn

Displegañ

Penaos eo kanet? Teknik, nerzhenn, perzh

Perzh an eiladur

pe gemenn a zo er ganaouenn?

Perzh ar ganaouenn en istor-douaroniezh hag er sevenadur dre vras

Petra a dalvez ar ganaouenn

D - Dielfenniñ delwennoù

kinnig

Titl, aozer (broadelezh), deiziad, pelec'h emañ war ziskouez?

Degouezhad en istor : darvoudoù politikel, ekonomikel

dodenn : ar pezh a weler

Deskrivañ ha dielfenniñ

an objed : neuz, stumm, emzalc'h...

danvez ha teknik : un danvez nemetken (sevel) pe meur a hini (stroll) : maen, douar, arem, plastik... Moullañ?

Aozañ an tudennoù ha/pe an objedoù : kempouez pe get, sonn pe a-blaen, urzhiet pe get, buhezek pe diflach

Displegañ

Pe gemenn(où) a-berzh an aozer?

Pe zoare da skeudenniñ : idealour, gwirheñvel, dazontour, eztaoler, difetis...

Petra a dalvez an delwenn?

E - Dielfenniñ bannoù-treset

kinnig

Treser ha senarioour, broadelezh, titl, deiziad m'eo bet embannet

Evit piv eo bet savet , pelec'h e vez skignet, penaos eo bet degemeret

Diverradenn an albom

Degouezhad en istor : darvoudoù politikel, ekonomikel

Deskrivañ ha dielfenniñ

Aozañ ar bajennad : niver a dresadennoù, penaos eo aozet ar senennoù

lec'h ar senennoù : lec'h, deiziad...

dielfennañ kement tresadenn a zo : ar skeudennoù (tudennoù, o endro...), lagadennoù (pe zoare : danevelliñ, divizoù...). Dave(où) d'an degouezhad istorel?

Aozañ an tresadennoù : ment, aozañ diabarzh, livioù, linennoù pennañ...

Petra a zo kemennet deomp?